



## DISPUT

### ETRE AR MARO HAC AN DEN YAOUANQ

*Ar Maro.*

Cete me éru, va mignon,  
Da ober dit renta réson  
Demeus da vue tremenet,  
Scuis eo Doue ouz da velet.

*An Den Yaouanq.*

Antro Doue, piou eo emân  
A zo deun queu dizonj amân !  
Va speret a zo oll troublet  
Gant epouvant eus e glevet.

*Ar Maro.*

Petra lavares, va mignon ?  
Lez da spont ha cont da réson  
Ha na vouies-te qet ervad  
E teujen abred be divezad ?

*An Den Yaouanq.*

Allas ! sivoas, ne youien qet  
E l'eac'h donet qen abret ;  
Me zonje din, pa voan dispos,  
Ne varvjen, qen e vijen côs.

*Ar Maro.*

Mes alies e poa clévet  
Ne meus biscoas den espernet,  
Hac a tleap an oll fac'had,  
Côs ha yaouanq eus a beb oad.

*An Den Yaouanq.*

Allas ! sivoas, en joa ar bet  
E voa va speret occupet :  
Em yaouanquis voâ va fianç,  
Hac em mignonet va esperanç.

*Ar Maro.*

Penos den sot hac aheurtet  
Ne voas-te qet avertisset  
Da réformi da voal vue,  
Pa ne voas quet sur a un de ?

*An Den Yaouanq.*

Allas ! me vel on faziet ;  
Mar plij ganéc'h, choas deportet  
Roit d'in o'hoas termen,  
Ma rin qent mervel pinijen.

*Ar Maro.*

Penos e fel dide ober  
Pinijen en qen ber amzer,  
Pa ne c'heus gret bete vrëman,  
Ma te pell zo var ar bed-man ?

*An Den Yaouanq.*

Me bromet déc'h, a dra certain,  
E rin prontamant pinijen  
Da repari ma yaouanquis.  
Ma roit din termen eur mis.

*Ar Maro.*

Avoalc'h ec'h eus bet a' amzer,  
Ma carfes ober da zever ;  
Mes ne alles pelloc'h appel :  
Eru an heur ret é mervel.

*An Den Yaouanq.*

Pe n'em dé qet ho polante  
Va lezel queit-se en bue.  
Ma plij ganec'h, da vianan,  
Un devez c'hoas a c'houlennan.

*Ar Maro.*

Harça ! bremâ paciantet :  
Eru an heur, ret é monet ;  
Rac-se-ta, sonj es coalt vue,  
Ret é monet dirac Doue.

*An Den Yaouanq.*

Penos eta, mervel so ret  
A greiz va nerz ha va yec'hel !  
Enos quittat va dessenjou,  
Va joa, va c'herent, va madou ?

*Ar Maro.*

Diveat out bréma da vouela,  
Homan é da heur divea :  
E zan da rei did an tol marvel  
En heur-mâ e renques mervel.

*An Den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT E  
GUERENT HA MIGNONET.

O va c'herent ha mignonet,  
E han'Doue, va zikouret !  
Scoet oun gantan d'ar maro ;  
Dent d'am zicour, nastit afo.

*Ar Guerent hac ar Mignone,*

Evit breman ne a' lomp qet,  
Beza hon eus ar asfer presset ;  
Pa retornimp, ni a velo,  
N'oc'h eus qet a feçon maro.

*Ar Maro.*

Güel, den zot ha den aheurtet,  
Petra respont da vignonet !

Anzao breman den diavis,  
Peguer tromplus é yaouanquis,

*An den Yaouanq.*

Güir a larit, me zo tromplet  
Gant yaouanquis a mignonet :  
Breman me ro dé mil mallos ;  
D'am oll malheur e zint bet caus.

*A Den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT DOUE  
HAC AR VERC'HEZ,

Me o suppli, ô va Jesus !  
Ha c'hui, Güerc'hez, Mam druezuz.  
Me ho ped dre ho madelez,  
D'am zicour c'hoas me pec'hergez.

*An Autro Doue.*

Penos en teus an assuranç,  
Da c'houlén aistanç ?  
Bepret out bet hon adversour ;  
Petra ve demp-ni da zicour.

*An Den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT AR ZENT

O Zent, mignonet da Zoue,  
Ho ped truez ous va ene !  
Gant an oll oun abanlonnet ;  
En han' Doue va zicouret,

*Ar Zent.*

Penos ec'h eus au hardisson  
Da c'houlén hor protection !  
Ne c'heus qet miret hor goueliou.  
Nac imitet hon vertuziou.

*An Den Yaouanq.*

E C'HOULEN SICOUR DIGANT E  
ÆL-MAD.

O va Æl-mad ! ô va den qer  
Vaq gardien en peb amzer,  
M'ho ped, va sicourit bremâ  
Em necessite diveza.

*An Æl.*

Quement a ellen a meus grêt :  
Bete vremâ en da andret :  
Poent e zeo din d'abandoni,  
Pa ne teus qet sentet ouzin.

*An Den Yaouanq.*

Me vel ervad é tremenet  
Va amzer da veza sicouret ;  
Revet e meus en libertin,  
Doue a rent justiç erfin,

Em maro em diles Doue,  
Pa 'm loa'n dilezet em bue ;  
Resistet meus d'e oll graçou  
Hac em refus em goulennou.

*An Den Yaouanq.*

**E QUITAD HE GUERENT HAC HE**

**VIGNONET.**

Dileset oun en abandon ;  
N'en deus mui evidon pardon.  
Adieu, gerent ha mignonet,  
Adieu, bed fall ha miliguët.

*An Den Yaouanq.*

**E QUITAT JOAUSDET AR BED-MAN.**

Adieu, grandeur ha bombançou,  
Emoriou vén ha triomphou ;

Adieu d'an tréou eus an douar ;  
Adieu d'an ée, adieu d'he c'hloar.

Mallos d'ar vam, mallos d'an tad  
A zo bet ouzin quen ingrat,  
M'o deus grêt din coll va ene,  
D'am b'za lezet en liberte.

E zan da vezan entéret  
En ifern gant an dud daonet,  
Da lesqui ebars er flammou.  
Da james gant an diéoulou.

Ha possubl ve, ô va Done,  
E seroc'h ouzomr dor an ée !  
Obtenit demp, ô va Zalver ?  
Eur plaç en ho cloar eternal.

(Propriété)



---

Lanhuon, en ty intañvez ar Goffic.